

— 87 —

## SONNEN

Sonnen er souben dré leah

*Più nen des chet ahoel kleuet konz ag er soñnen-men ? En ton anehi, merchet gel ur muzikour dispar, en E. Bourgault-Ducoudray (ur Breihad) en des groeit tro er bed hag é pep léh é ma kavet kaer, biskoah kementral. Er honzeu nen dint ket drouk anché eùé.*

*Er honzeu e lakamb ama e zou bet keméret lod é kosté Ploué, lod aral é kosté Baud. Lakeit em es ind en ur lod hag elsé, é kav genein, é ma braüet en treu. En ton e zou a Bloué.*

*Mar des émeshk lénerion pé lénérézed Dihunamb ré hag e houer pozieu aral, me houion gradral dehé mar ou hasant d'ein. Lakeit e veint ar en daslumaden.*

*Et ma houiér, guéharal é vezé chervijet souben leah a kement fest e vezé hag é vezé kañnet er soñnen-men. Mat e vehé d'er ré iouank derhel d'er mod-sé ha derhel eùé d'er soñnen-men : treu sord-men e hra inour d'er Vretoned.*

L. H

The musical score consists of six staves of music in common time (indicated by '9') and one staff in 6/8 time. The lyrics are written below each staff:

- Staff 1: Nen domb ket deit du men eit go-
- Staff 2: bér jabl de zén eit gobér jabl de
- Staff 3: zén Rak kent do - net du men
- Staff 4: hun es dé - bret hun hoén Rak
- Staff 5: ken do - net du men hun es dé - bret hun
- Staff 6: hoén,

## — 88 —

## I

Nen domb ket deit dumén eit gobér jabl de zén  
Rak kent donet dumén hun es dèbret hur hoén.

## II

Deit omb de gonfortein ur galon glaharet  
Kalon ur plah iouank noz ketan hé éred.

## III

Mar soñnet, sonnerion, soñnet dousik ha skan,  
Ma er souben dré leah é vonet ar en tan.

## IV

Mar soñnet, soñnerion, soñnet menut ha gé  
Ma er souben dré leah e vont ar en trepé.

## V

Er gansortéz tostan e rouz en amonen  
Hag er hansort tostan e hé (1) ag er souben.

## VI

Mar soñnet, soñnerion, soñnet hui deu ha deu  
Ma er souben dré leah é vont ar en trezeu.

## VII

Mar soñnet, soñnerion, soñnet menut ha stank  
Ma er souben dré leah é vonet ar er bank.

## VIII

Mar soñnet, soñnerion, soñnet menut ha gé  
Ma er souben dré leah é vonet ér gulé.

## IX

Saüet, deu zén iouank, na saüet hui hou pen  
Keméret bep a loé ha tañoëit er souben.

## X

' Hetan tam anehi vou d'er Huerhiéz Vari  
En eil tam anehi vou d'hou pried ha hui.

## XI

' Drivet tam anehi vou d'hou tad ha d'hou mam  
En des bet hou maget hag hou miret divlam.

## XII

' Bearvet tam anehi vou d'hou prér ha d'hou hoér  
En des bet hou karet étré ma oeh ér gér.

(1) Héein = tranpein.

— 89 —

## XIII

' Bempvet tam anehi vou d'hou iondr ha moéreb  
Hag e hré joé dohoh a p'en deh d'ou guélet.

## XIV

' Huéhvet tam anehi e vou d'hou amieu  
E zou deit a bep tu de soñnein d'oh hou teu.

## XV

Chifet en dén iouank ! durheit doh er planken,  
Ha touiet mat en des ne zistroei birùiken.

## XVI

Taùet, déníg iouank, arrestet hou tareu  
Ken ' vou disternet koén ha lahet er goleu.

## XVII

Ken ' vou disternet koén ha lahet er goleu  
Marsen en deu zén iouank e zistroei hoah ou deu.

## XVIII

Soñnet hui soñnerion, soñnet menut ha gé  
D'inourein er plah iouank, chifet én hé gulé.

## XIX

D'inourein er plah iouank, chifet én hé gulé  
Balamor d'en taput e gas en dud dehé.

## XX

Taùet, taùet, plah iouank, arrestet hou tareu  
Ken ' vou disternet koén ha lahet er goleu.

## XXI

Ken ' vou disternet koén ha lahet er goleu,  
Marsé nezén ahoel um réjociseint ou deu

## XXII

Soñnet hui, soñnerion, soñnet menut ha gé  
D'inourein en dud iouank kousket én ou gulé.

## XXIII

Mal e vou d'emb bremen um dennein a kosté  
Lezel en deu bried kousket 'n ou haranté.

